

# RECIT

COMPOSET A NEVEZ

VAR SUJET AR

## MALEURUS

AN EUS TENNET VAR UR GRUCIFI

*En departamant a l'Oorn*

VAR UN TON TRIST.

BRETONET, me ho supli, tostait da glevet  
Ur recit deus un exempl a nevez arruet,  
Mar be madeles Doue rei din ar sclerigen,  
Emeus c'hoant da disclerian en toues ar gristenien.

Un den a religion a glevo quement-ma,  
E oat hac e oaziou a deniou da grenn ;  
Ma unan eo troublet ma speret en antier  
O clasq dibab er façoun da rei da intent scler.

En heisvet devez voar nuguent a vis gouelen,  
Er blaves c'huec'h var nugent, c'helaouet, cristenien,  
E voa en daou den maleurus gant a hent e vonet  
Evit ober ur veach o devoa prometet.

Unan deus an daou den-mâ a voa ur chasseur,  
 Hac a beai an droit chasse da vale e gartier,  
 Hac a dougue e fusilh partout elec'h ma hai  
 Dre ma voa bet surprenet er c'hoat gant lonet goue.

Hac o tonet da dremen ur c'halvar a nevez  
 Savet en tal ur veret en fin ur jubile,  
 Hac a doug er figuriou deus ar bassion  
 En eus souffret on Salver da bean on rançon.

Unan a nes a denna se doc divar e ben  
 Evit ober e dever evel ar gristenien,  
 Da saludi ar Salver santel a biniguet  
 Abalamour den imaich a voel crucifiet.

Distrañ res ar maleurus pa voeles quement-mâ ;  
 Dre ur gos injurius a c'houlenes ountân :  
 Da betra tenes da doc, eme, den ingrat,  
 Te sonch dit bea salvet o saludi un tam coat ?

— Guelet a ran dirason da vestr a ma hini  
 Laqueet dre hon fec'hejou ebars er grucifi,  
 Ha pe deuio don guervel on ret aparissant  
 A rentan cont d'ar barner pa sonjomp nebeutan.

— Arret a me a discoueu dit en un instant  
 A pe fel dit lavaret eo cren a puissant,  
 Brassoc'h mestr e hon evitan pa man er grucifi,  
 Me he disquenno dan douar hep donet d'e bidi.

Sevel e ra e fusilh hac eneus-an tennet  
 Voar en imaich adorabl eus ar Christ biniguet,  
 Ha dre an toul en eus gret e strinquas er goat  
 Quen e he bet abimet bijas ar miserabl.

Dre ar boize deus an torfet e deus bet cometet  
 E tigores an douar hac en eneus-an lonquet  
 Dre bermission Doue betec e diou gasel  
 Ma voe rentet en ur stat pitoyabl a cruel.

E gamarat pa velas quement-mâ  
 A dap croc en e divrec'h evit essa e denna,  
 Misericord e crias a ma voa estonet  
 Ha ma hes d'ar presbyter evel un den egaret.

Supplia a ra ar c'hure da dont gantân an ent  
 Hac e teuont assambles da visitan an exempl;  
 Fatiquen ra er belec pan o eus guelec ar goat  
 O tond deus ar grucifi eus an den miserabl.

Er spaç deus a bemp debes eo bet er plaç-ze :  
 Na neus den evit compren ar poaniou a soufre  
 Dre bermission Doue dalc'het en e brison  
 Quen a deu an autrou'n Escop hac e brocession.

Ar c'hure, an den-ma a bartias en quen  
 D'ober declaration en ur memes amser  
 Dirac an autrou'n Escop hac en oll sujedet,  
 Hac o lenn o josteni e voan oll estonet,

Ar sul vintin e pignas an autrou'n Escop  
 Er gador a guirionez evit avertissan ar bobl  
 Da donet d'e accompli gant e brocession,  
 Ma teugent d'ar plaç santel gant guir devotion.

Pa voa ar bobl d'an daoulin dirac ar groas santel  
 Dre bermission Doue e aparisses daou Ell,  
 A gante pobl a venvec da doulan an douar  
 Evit rei e liberte d'ar paour quer criminal.

Douguet eo d'an ilis d'assistan en oferen  
 A celebre an Escop hac e oll veleyen  
 Da drugarecât Doue hac on Mam biniguet  
 Deus ur c'hraç quen admirabl o deus dezi accordet.

A c'hane a voa transportet gant e vam hac e dat  
 Da finissan e vuez en ur stad pitoyabl,  
 Mut, bouzard hac innoçant a rent e isely  
 Hep galout en em zicour a hini mui quiny.

Pevar devez var nuguent eo bet en voele  
 O souffr poan a pinigen quen rentan e ene :  
 Goulenomp oll a galon ma vezo recevet  
 Gant Jesus hac ar Verc'hes e pales an Dreindet.

An den-mâ a oa oaget deus ur bla var nuguent,  
 A barres Sant-Yan ar C'hoat, evit rei da entent,  
 En departamant a l'Orn ; selanet, cristenien,  
 Un exempl considerabl a spontus da gompren.

